

HC_0003_Ar vutunerien

Bal gavotte

Ur paotr bihan ‘ bemzek vloaz
pa n’ em lakaet da rimañ
Evit diduañ e amzer
P'en deus netra ken da ober

War sujet ar vutunerien
Pere a implij al louzaouenn
Digaset deomp deus a bell vro
Gant un doktor anvet Nicot

Koulz ar baotred ‘vel d’ar merc’hed
a lâre int bremañ touellet
Da lakaat bep s(iz)hun o arc’hant
E kesoù ar gouarnamant

‘n ur vont d'ar park da labourat
E renkont kaouet ur chikat
Ur garotenn en o godell,
Koulz ar mestr evel d’ar mevel

An aotrou pa c'h a da bourmen
A gemero ul livitenn
E zaou zorn gantañ ‘n e vragoù,
Ur sigaretenn ‘n e c’henoù

Ar paourkaezh Fañch ar pilhaouer,
Torr a rafe e zivesker
evit tastum un tamm mego
Kouezhet deus genoù an aotrou

An hani a c’houne ar muiañ
ez eo Gouarnamant Mariana
Itron Vari ar Republik
Honnezh zo ur plac’h pinvidig